



11 – Bemdez, bemnoz (Ifig et Nanda LE TROADEC)

Cette chanson a été collectée par Ifig LE TROADEC auprès de Louise LE GROUIEC (Mme LE ROI) à Trédarzec le 27 février 1993. Elle a été publiée dans Carnets de route, p. 192.



BEMDEZ, BEMNOZ

Chaque jour, chaque nuit

Bemdez, bemnoz e-barzh ma gwele ma-unan
E-lec'h kousket me ne ran nemet gouelañ
E-lec'h kousket me ne ran nemet gouelañ
Pa deu da soñj diñ deus an hini a garan ar muiañ

*Chaque jour, chaque nuit, seul dans mon lit
Au lieu de dormir je ne fais que pleurer
Au lieu de dormir je ne fais que pleurer
Quand je pense à celle que j'aime le plus*

Bemdez, bemnoz, me ac'h a da Goad-ar-Forest
En esperañs evit gwelout ma mestrez
Evit gwelout anezhi o tonet da gerc'hat dour
Hag o kontañ dezhi ma sekred ha ma amour

*Chaque jour, chaque nuit je vais à Koad-ar-Forest
Dans l'espoir de voir ma maîtresse
Pour la voir venir chercher de l'eau
Et lui révéler mon secret et mon amour*

P'am eus gwelet e-barzh ar c'hoad nen arrie ket
War an delioù, ma sekrejou am eus skrivet
War dister draoù, den yaouank, e skrivet
da sekrejou
Pa skrivet anezhe war delioù ar c'hoajou

*Quand j'ai vu qu'elle n'arrivait pas dans le bois
J'ai écrit mes secrets sur les feuilles
Jeune homme, tu écris tes secrets sur bien peu
de chose
Puisque tu les écris sur les feuilles des bois*

Me a skrivio anezhe war vordig ar sabronenn
E-lec'h biskoazh zo bet bod brank na strujenn

*Je les écrirai sur le bord du sable
Où il n'y a jamais eu ni branche ni végétation
d'aucune sorte*

Ma skrivet anezhe war vordig ar sabronenn
Pan arrio glav, avel hag an tourmant
Pan arrio glav, avel hag an tourmant
Da sekrejou a bartio den yaouank

*Si tu les écris sur le bord du sable
Quand viendra la pluie, le vent et la tempête
Quand viendra la pluie, le vent et la tempête
Tes secrets s'envoleront, jeune homme*

Gwelloc'h e vefe o skrivañ em c'halon
Eno e chomfent, kloaregij, gravet don

*Il vaudrait mieux les écrire dans mon cœur
Ils y resteraient gravés profondément, jeune clerc*